

CONSEIL NATIONAL BRETON

733

DÉCLARATION

PROGRAMME

Pontivy, 3 Juillet 1940

C. N. B.
20, Rue Waldeck-Rousseau
RENNES

1940

KUZUL BROADEL BREIZ


DISKLERIADUR

ROLL-MENNADOU

Pondivi, 3 a viz Gouere 1940

K. B. B.
20, Rue Waldeck-Rousseau
ROAZON

1940



LE COMITE EXECUTIF DU C. N. B.

De gauche à droite : O. MORDREL, F. DEBAUVAIS (Directeur du C. E.), M. GUIEYSSE, C. LAINÉ

Kant hag hanter kant vloaz ' zo eun toullad Brezoned dallet gant fals-menoziou c'houezet war Vreiz gant Bro-C'hall a en em vodas e Pondivi, mesk-hamesk gant estrenien hag a zisklêrias na oant ket mui Brezoned, hogen Fransizien.

Evito da gredi e kasent da Vreiz eur vuhez nevez e tigorjont hent an distruj hag an dismantr evit hor broadelez.

Ni, brogarourien vrezon, deredet hirio a bep korn a Vreiz e Pondivi, a embann dirak ar bed kement-man : n'hon eus nemet eur vro : BREIZ.

Toui a reomp difenn e pep kenver hag e pep degouez Gwir ar Vrezoned da veva evel Pobl dishual.

Doue d'hor gwarezi e-doug an emgann didruez a grogomp ennan aman evit hor Bro.

F. DEBAUVAIS,

(Prezegenn e Kastell Pondivi, 3-7-1940.)

« Il y a cent cinquante ans, un groupe de Bretons sans mandat, aveuglés par une fausse idéologie, introduite en Bretagne par la France, se réunirent à Pontivy, avec des étrangers, et déclarèrent qu'ils n'étaient plus Bretons, mais Français.

Bien qu'ils fussent persuadés d'introduire ainsi une ère nouvelle en Bretagne, ils ouvrirent en réalité le chemin à la ruine et à la destruction de notre nationalité.

Nous, Patriotes Bretons, accourus aujourd'hui à Pontivy de toutes les parties de la Bretagne, proclamons devant le monde que notre seule Patrie est la BRETAGNE.

Nous jurons de défendre, dans toutes circonstances et envers tous, le droit des Bretons à vivre comme peuple libre.

Que Dieu nous protège pendant la lutte inlassable que nous ouvrons ici pour notre pays. »

F. DEBAUVAIS,

(Discours au Château de Pontivy, 3-7-1940.)

KOUEZET Bro-C'hall en he foull, e-keñver an arme hag e-keñver ar politikerezh, setu ar Bobl Vreizat o welout rag-eeun dirazi dalc'h ar C'hermaned, hag hi digablus-krenn koulskoude.

Arzao-brezel Mezeven, evitañ da veza echuet ar stad a vrezel, ne beurzivizas ket tonkadur Bro-C'hall. An tonkadur-se ne vo anavezet nemet pa vo sinet an emgleoiu a beoc'h. Bez' ez eus eun dra avat hag a zo diarvar : pezh a chomo diouz Bro-C'hall ne vo tamm ebet heñvel ouz Bro-C'hall, an hini hon eus anavezet kent argad ar C'hermaned. Echu eo houmañ da vat. Diwar vremañ, koazet eo beli ar Stad c'hall war Vreiz da netra, pe da hogozik netra.

Daoust da gement a reas Breiz dec'h evit Bro-C'hall, hepred e voe graet ouz hor bro evel ouz eun advro didalvez, eun dachennad-vrezel a oa ret kaout hep na vije ret da zen damanti ouz he hevoud ; betek an deiz diweza e voemp, e sell ar C'hallaoued, mevelien vat paeet fall o emrousted ; brao c'hoaz pa vezent paeet. Re e c'houzañvas hor bro diouz ar stad-se evit plega d'ez i adarre.

Evidomp Breiziz, poent eo rei d'ar bed da c'houzout pezh a c'hoantaomp abaoe kantvedou hag en em brienti da ren hon-unan traou hor bro. Gant ar peoc'h e vo savet eun Europa nevez : evit Breiz e vo ar c'houz da gemer he lec'h enni, n'eo ket evel rannvro veveliekaet, hogen evel Broad dishual hag enoret.

N'hon eus ket da fiziout war c'houarnamant izil kêr Vichi, hag heñ drailhet a-benn bremañ gant rendaelou a-ziabarz, da rei da Vreiz ar benvegennou politikel, arboellerezhel ha sevenadurel he deus kement ezomm anezo. Ar stadreoliadur nevez, na kig na pesk, a vezer o kenaoza e Vichi d'ar mare-mañ ne dalvez ket d'ar Bobl vreizat : daoust ha n'eo ket diazezet gant tud a zo hon ezommou materiel ha speredel dianav-krenn d'ezo, gant tud n'o deus damant ebet outo, gant tud o deus en em ziskouezet hep tro evel enebourien d'hor frankizioù ret, gant an dud end-eeun o deus stlojet Breiz, a-unan gant Bro-C'hall, betek an taol-freuz ?

D'ar Bobl vreizat, d'ez i hepken, eo rei d'ez i hec'h-unan, dioustu, kenframmadurioù d'he gwarezi rak ar BARRADOU a-ziabarz a ginnig Bro-C'hall, rannet e tammou oc'h en em ganna etrezo, bihanaet, aet digempouez.

Ma tegouez da Vro-C'hall, daoust d'ar barradou-se, adkavout he c'hempouez, ma teu a-benn da vera mad an holl ez onest, ha

L'EFFONDREMENT militaire et politique de la France a mis le Peuple Breton en contact direct avec l'occupation allemande dans laquelle il n'a pourtant aucune responsabilité.

En mettant fin aux hostilités, l'armistice de juin n'a pas réglé le sort final de la France. Celui-ci ne sera connu qu'à la signature des traités de paix. Une chose, en tout cas, est dès maintenant certaine : ce qui restera de la France ne ressemblera en rien à la France que nous avons connue avant l'offensive allemande. Celle-là est finie pour toujours. D'ores et déjà, le pouvoir de l'Etat français sur la Bretagne se trouve réduit, sinon à rien, du moins à peu de chose.

En dépit de tous les services rendus, la France d'hier a toujours traité la Bretagne en pays de seconde zone, en zone stratégique nécessaire à posséder mais dont le bien-être n'intéresse personne : jusqu'au bout nous aurons été pour elle de bons serviteurs mal payés de leurs sacrifices ; si même ils en étaient jamais payés. Notre pays a trop souffert de cette situation pour en accepter jamais le retour.

Pour nous, Bretons, le moment est venu de faire connaître au monde nos aspirations séculaires et de nous préparer à prendre en mains nos propres affaires. Avec la paix va se construire une nouvelle Europe : ce sera pour la Bretagne le moment où jamais d'y prendre sa place, non plus comme province domestiquée, mais comme Nation libre et honorée.

Nous n'avons pas à compter sur le débile Gouvernement de Vichy, déjà déchiré par des dissensions intestines, pour doter la Bretagne des organes politiques, économiques et culturels dont elle a un si pressant besoin. La nouvelle Constitution, ni chair ni poisson, qui s'élabore actuellement à Vichy est sans valeur pour le Peuple Breton : n'est-elle pas en effet établie par des hommes qui de nos besoins matériels et moraux n'ont ni la moindre connaissance, ni le moindre souci, par des hommes qui en toute occasion se sont affirmés comme les adversaires de nos plus nécessaires libertés, par ceux-là mêmes enfin qui, avec la France, ont entraîné la Bretagne dans la catastrophe ?

Au Peuple Breton, et à lui seul, il appartient de se donner dès maintenant les institutions qui le protégeront contre les CONVULSIONS intérieures dont est menacée une France divisée contre elle-même, amoindrie et déséquilibrée.

Si au lieu de ces convulsions la France retrouve son équilibre, si elle revient à une saine administration de la fortune publique,

dreist-holl ma'z eo gouest da zilezel he folitikerez a-enep Breiz hag he mennadou kuz d'he feurheñvelaat outi, neuze e c'hello Breiz breutaat ganti, ha diouz ret, ober kevredigez ganti ; — hogen, a-raok hen ober, pez a rankomp kaout hep mui dale, eo eur Stad vreizat renet gant Breiz evit gounid Breiz nemetken.

Setu perak ez en em vodas ar stourmerien ken abred hag an 3-*vet* a viz Gouere 1940, e Pondi, e stumm eur C'HUZUL BROADDEL BREIZ. Eno ez asantjont d'eun DISKLERIADUR o spisaat pennziazevou Breiz warc'hoaz hag ez anvjont eur STROLLAD-OBERIA karget da suraat renidigez an Emzao.

Danvez-labour KUZUL BROADDEL BREIZ a zeu a-wel pa lenner an diellou a ginnigomp d'hor c'henvroiz : danzen donedigez ar Stad vreizat a bareo an droug graet ouz ar vro gant dispac'h ha gwast 150 bloaziad renadur gall, a zigresko gwalennou ar brezel hag an dalc'hadur dre an urz vat, ar peoc'h kevredigez ha relijiel, hag ar reiz evit an holl.

Kudennou all a sav en deziou-mañ :

BREIZ, DIGABLUS ER BREZEL-MAN, NE DLE KET GOUZARN TONKAD AR RE DREC'HET. Ar merereziou gall chomet en o lec'h dindan dalc'hadur ar C'hermaned n'eus d'ezo nemet eun dalvoudigez vicherel etre daou renadur. Hualet int ; n'o deus ster ebet ; n'int ket evit pledi gant mad an holl Vrezoned e-keñver al Levierien c'herman. Da GUZUL BROADDEL BREIZ eo hen ober kement ha kenkoulz ha ma c'hell.

Ne voe bodadeg Pondivi d'an 3-*vet* a C'houere nemet ar bazenn genta.

Digor emañ KUZUL BROADDEL BREIZ d'ar Vrezoned a bep kostezenn gant ma vennont labourat da wellaat amzer da zont ar vro.

Dambrest e vo graet eur vodadeg nevez en unan eus hor c'hé-riou. Ledanaet e vo ar Bodad-Seveni anvet e Pondi ; emeur o tanzen eur Bodad-Allia, a vo dastumet ennañ kement nerz-stourm a zo e Breiz ha kement gouiziegez a zo e dalc'h ar re o deus meizet emañ taolet tonkadur Breiz er c'hoari.

A-viliadou e tegouez ganimp asantou an dud. A-vilvern e teu d'hor bureviou testeniu a gengarantez. Pedit a reomp, — ne vern peseurt kredenn a zo d'ezo, — an holl Vreiziz o deus lorc'h en o amzer dremenet, o deus c'hoant da labourat evit mad an holl, hag a vez pebez amzer da zont a zigor dirak Breiz, da striva a-du ganimp. E kastell an Istor emañ kloc'h Breiz o c'hervel.

si surtout elle se montre capable de renoncer à sa politique anti-bretonne, à ses arrière-pensées d'assimilation, alors la Bretagne pourra avec elle discuter et, au besoin, s'associer, — mais avant d'en arriver là, ce qu'il nous faut sans plus tarder, c'est un Etat Breton dirigé par des Bretons dans l'intérêt exclusif de la Bretagne.

C'est pourquoi les militants se sont réunis dès le 3 juillet 1940, à Pontivy, en CONSEIL NATIONAL BRETON. Ils ont adopté là une DÉCLARATION établissant les principes sur lesquels la Bretagne de demain sera constituée et nommé un COMITÉ EXECUTIF chargé d'assurer la direction du Mouvement.

La tâche du CONSEIL NATIONAL BRETON ressort des documents que nous présentons à nos Compatriotes : préparer l'avènement de l'Etat Breton qui réparera les torts faits au pays par les désordres et la gabegie de 150 années d'administration française, pensera les maux de la guerre et de l'occupation dans l'ordre, la paix sociale et religieuse, la justice pour tous.

D'autres problèmes se posent dans les jours présents :

LA BRETAGNE, SANS RESPONSABILITE DANS CETTE GUERRE, NE DOIT PAS SUBIR LE SORT DES VAINCUS. Or les administrations françaises restées en place sous l'occupation allemande remplissent un interrègne purement technique. Elles ne sont pas libres, elles ne représentent rien, elles sont hors d'état de prendre en main les intérêts de tous les Bretons devant les Autorités allemandes. C'est au CONSEIL NATIONAL BRETON qu'il revient de le faire dans toute la mesure de ses moyens et le plus tôt possible.

La réunion de Pontivy du 3 juillet n'a été qu'une première étape.

Le CONSEIL NATIONAL BRETON est ouvert aux Bretons de toutes nuances pour peu qu'ils soient décidés à agir afin d'assurer au pays un avenir meilleur.

Bientôt, une nouvelle Assemblée aura lieu dans une de nos villes. Le Comité Exécutif nommé à Pontivy sera élargi, un Conseil Consultatif réunissant toutes les forces bretonnes militantes et toutes les compétences qui auront compris que le destin de la Bretagne est en train de se nouer, est en préparation.

Déjà les adhésions nous parviennent par milliers. Les témoignages de sympathie affluent à nos bureaux. Nous invitons sans distinction d'opinion tous les Bretons fiers de leur passé, soucieux d'agir pour le bien du pays, conscients de l'avenir qui s'ouvre devant la Bretagne, à joindre leurs efforts aux nôtres. L'heure de la Bretagne sonne au cadran de l'Histoire.

RAKLAVAR

Breiz n'eus ket anezi eur rannvroad a Vro-C'hall, hogen eur vrôad diforc'h diouti, ganet diwar darvoudennou er-maez hag en araok da furmidigez Bro-C'hall.

E-pad mil vloaz ez eus bet anezi framm eur Stad dizalc'h, testeniet hec'h unvez dre stabiled he harzou end-ecun a zalc'h digemm abaoe an ^{vet}ix^{vet} kantved.

Da heul brezelioù-koll e voe unanet Breiz ouz Bro-C'hall, da genta e reiz eun unanelez dén-ouz-dén dre zious eured Anna Vreiz, da c'houde, dindan an doare-renadur urziet dre feur-emgleo 1532, da lavaret eo an *emrenerez*, e ster resis ar gêr-se, e stern Stad roueel Bro-C'hall. Ne voe biskoaz etre Bro-C'hall ha Breiz kevredad-reizek ebet estr eged an akta-ze *a-zaou-du* ez rik.

Nozvez ar Pevare a Eost da genta, rannidigez Bro-C'hall e departamantou da c'houde a zo deut da gas da get ar stad-reizek-hont dre youl *untu* unan eus an diou gevrenn. Diwar neuze ne voe etre Bro-C'hall ha Breiz kevredad-reizek ebet, hogen hepken darvoud tuzum aotrouniez Bro-C'hall, Eman ar stad darvoudek-se, goude d'ezhi padout eur c'hantved hanter, o paouez beza skubet d'he zro gant donedigez an armead alaman, peursteziet dirazi pep skeudenn eus an dalc'h gand armou Bro-C'hall.

Ha hi bet divelieta, n'he deus ket Breiz degemeret ar blanedenn lakaet d'ezhi gand ar Stad-C'hall, alouberezh he douar. Dindan an hen-rouantez taolioù-dispac'h 1675 ha 1720, stourm Stadoù-Breiz hag al Lez-Veur ouz galloud ar roue o deus spizet ar youl start a zo bet bepred er Vreiziz da viret d'o mamm-vro hec'h emrenerez.

Abaoe c'houec'h-ugent vloaz, abaoe 1918 peurgetget, oberou eun niver kevredadoù brogar, darn anezo relijiel, darn all politikel, ken rannvroadelek, ken lieskevredadelek ha disrannelek, a daol testeni n'he deus kollet Breiz biskoaz hec'h emskiant vrôadel na dizalc'het da zifenn ar madou a denn d'he buhez. Nepred ivez an hen-rouantez, ha nebeutoc'h c'hoaz ar renerezoù ganet diwar an Dispac'h n'o deus diroudennet diouz o folitikerezh a naska ha divrôadela.

PRÉAMBULE

La Bretagne n'est pas une province de la France, mais une nation distincte de celle-ci, née d'événements étrangers et antérieurs à la formation de la nationalité française.

Pendant mille ans elle a été le cadre d'un Etat indépendant dont l'unité est attestée par la stabilité même de ses frontières, immuables depuis le ^eix^e siècle.

A la suite de défaites militaires, elle a été unie à la France, d'abord sous forme d'union personnelle par les deux mariages d'Anne de Bretagne, ensuite sous le régime organisé par le traité de 1532, c'est-à-dire l'autonomie au propre sens du terme, dans le cadre de l'Etat royal français. Il n'a jamais existé entre France et Bretagne d'autre lien de droit que cet acte essentiellement bilatéral.

La nuit du Quatre Août d'abord, la division de la France en départements ensuite (1789) sont venues détruire cet état de droit par la volonté unilatérale d'une seule des deux parties. Depuis lors il ne subsiste plus entre France et Bretagne aucun lien de droit, mais seulement le fait matériel de la domination française. Cet état de fait, qui aura duré un siècle et demi, vient d'être à son tour aboli par l'arrivée en Bretagne de l'armée allemande, devant laquelle toute trace d'occupation militaire française a disparu.

Frustrée de sa souveraineté, la Bretagne n'a jamais accepté le sort qui lui était fait par l'Etat français maître de son sol. Sous l'ancienne monarchie, les révoltes de 1675 et de 1720, la lutte des Etats et du Parlement de Bretagne contre le pouvoir royal, ont marqué la volonté bien arrêtée qu'ont toujours eue les Bretons de conserver à leur patrie son existence autonome.

Depuis cent vingt ans, et plus particulièrement depuis 1918, l'action de nombreuses Associations patriotiques, les unes culturelles et les autres politiques, tant régionalistes que fédéralistes et séparatistes, témoigne que la Bretagne n'a jamais perdu sa conscience nationale, ni renoncé à défendre ses intérêts vitaux. Jamais, en effet, l'ancienne monarchie, et moins encore les régimes issus de la Révolution, n'ont cessé de poursuivre une politique de contrainte et d'assimilation.

Abaoe 1789 dreist-holl ez eus bet graet ouz Breiz evel ouz eun drevadennad an Inizi. He spleitou buhezegezel ha speredel a voe disprizet hag he yez, ardamez hepred beo he brôadelez, argaset diouz ar skoliou ha berzet en he buhez dibrevez (voutin); gwalleget e voe hec'h ampledou arboellerezel, pe vouget a-ratoz gant renerez Pariz e-kerz ampledou gall rik; dispignet eo bet, hep distro d'o Bro, gwad Breiziz en holl vrezeliou gant Bro-C'hall en Europ hag en Inizi. Diskleriadurieu-meur ar Brezel bras, oc'h azgoulenn da bep pobl eur vñhez vrôadel dieub n'eus ket bet graet diouto e-kenver Breiz, ha koustet ar brezel-ze o buhez da 240.000 Breizad, — eur marv diwar 14 Breizad, da lavaret eo pounnera kenfeur-kollou bet anavezet gand ar poblou er brezel, — eur marv diwar 28 Gall.

Ha n'he deus ket hepken ar Stad-C'hall, abaoe an Dispac'h, dic'houzvezet a-zevri beteg an ano a Vreiz ha dizanaoudet Mad he broiz, setu he deus ousspenn, er bloaveziou diweza, argaset ar vrogarourien, dre herzel o c'helaouennou, distroba o strolad, difenn o bodadou, heskina anezo en o stad-vuhez prevez pe voutin, redia d'ezo lec'hiou-anez, skrapa o madou, o c'has d'an toull-bac'h diwar diskred, traken ! a garantez-vro, o barn d'ar prizon ha d'ar maro.

Dre enebi evel-se ouz adsavidigez Breiz korf hag ene, dre lakaat, araok hag e-pad ar brezel, ar vrogarourien vreizat er-maez al Lezenn, he deus ar Stad-C'hall dikouezet splann e venne peurgas brôadelez Vreiz; hag en hec'h oberiadur a nerz-garv, kontrol da Reolenn-sol ar Stadsavadur end-eeun, o deus kavet an eneberien, — ret ma voe anezo ! — o digarez-leun.

En enep d'he grad-vat eo e voe stlejet Breiz er brezel diskleriet gant Bro-C'hall d'an Alamagn an trede a Wengolo 1939.

Abaoe ar spontadenn eus Gwengolo 1938 n'o deus ket paouezet pennou Brôadelerien Vreiz d'en em ziskleria a-enep fraez-ha-didro.

Setu aman ar pezh o deus embannet ar 25 a Here 1939 :

« Ra en em sello hor c'henvroiz evel peurziliammet diouz
« peb em-ouestlad e-kenver Bro-C'hall. Ra denno hepken o
« oberou da stumma an Nerz breizek a zaskoro d'eomp ar
« Frankiz d'ober hon-unan hag ar Gwir d'ar vuhez. »

Dre zilouc'ha pep roudenn a Veli-Vreiz he dou Bro-C'hall, a-ziwar an taol-ze end-eeun, kemeret warni gwarezi douar

Depuis 1789 surtout, la Bretagne a été traitée comme un territoire colonial, ses intérêts moraux et spirituels ont été méprisés, sa langue — symbole toujours vivant de sa nationalité — pourchassée des écoles et interdite dans la vie publique, ses intérêts économiques négligés par le gouvernement de Paris ou délibérément sacrifiés aux intérêts purement français, le sang des Bretons utilisé sans contre-partie dans toutes les guerres européennes ou coloniales de la France. Les solennelles affirmations de la Grande Guerre, d'après lesquelles tout peuple avait droit à l'existence nationale indépendante, n'ont pas été respectées envers la Bretagne, quoique cette guerre ait coûté la vie à 240.000 Bretons — un mort sur 14 habitants, c'est-à-dire la plus forte proportion de pertes enregistrée par les peuples en guerre — (un mort français sur 28 habitants).

Non seulement l'Etat français a, depuis la Révolution, systématiquement ignoré le nom même de la Bretagne et méconnu les intérêts du peuple qui l'habite, mais il a, ces dernières années, pourchassé les patriotes, interdisant leurs journaux, dissolvant leur parti, prohibant leurs réunions, les persécutant dans leur situation privée ou publique, leur imposant des résidences forcées, saisissant leurs biens, les emprisonnant sur simple soupçon de patriotisme breton, les condamnant à la prison et à la peine de mort.

En s'opposant ainsi au relèvement spirituel et matériel de la Bretagne, en mettant avant et durant la guerre les patriotes bretons hors la loi, l'Etat français a manifesté clairement sa volonté d'en finir avec la nation bretonne et son action de pure force, contraire au principe même qui était à la base de sa constitution, a trop bien justifié les réactions inévitables.

C'est contre son gré que le peuple breton a été entraîné dans la guerre déclarée par la France à l'Allemagne le 3 septembre 1939.

Depuis l'alerte de septembre 1938, en effet, les chefs du nationalisme breton n'ont cessé de se prononcer contre elle avec la plus entière netteté :

« Que nos compatriotes, ont-ils proclamé le 25 octobre 1939,
« se considèrent comme déliés de tout engagement à l'égard
« de la France. Que leurs actes visent seulement à constituer
« la force bretonne qui nous rendra la libre disposition de
« nous-mêmes et le droit à la vie. »

En supprimant toute trace de souveraineté bretonne, la France s'était automatiquement chargée de protéger le terri-

Breiz ouz peb argadenn estren. Hogen, goude hen dilezel da annezad mezus armeadou Bro-Saoz, setu e losk Bro-C'hall hor Breiz d'an dalc'h alamanek, ouz en em ziskregi *ipso facto* diouz derec'hel he beli war hor Bro.

Bet d'ezí nep kiriegez en darvoudou o ren, ne dle ket Breiz, hervez ar Gwir, dougen ar pouez anezo, na gouzany planedenn ar re drec'hel.

Biskoaz, abaoe 1532, ne vóe an « Eur » ker grevus, ken tu-pe-du. Hizio en em gav Breiziz dirag eur stad-trou nevez penn-da-benn e sell digouez hag e sell Reiz, d'ezo d'ober diouti e kement hent a zigor. D'ezo divizout o flanedenn, ha neket da Vro-C'hall-vreman, aet dic'halloud, na d'an Alamagn, anezi eur C'halloudegez-derec'hel-bro hep muiken.

A-bouez eo rei diwar-vreman da Vreiz an tu da c'hallout sevel he mouez hag embann he youl. Houman n'oufe beza diskleriet ez talvoudek gand ar sterniadou koz a bolitikerezh ha gand an dilennidi kent-brezel, peurfreuzet ar stal ganto ha ranket d'eomp paea kër o dallentez hag o digalon. Nebeutoc'h c'hoaz e vije diskleriet gand ar gargidi c'hall a zalc'h, dindan evezierzh an Alamaned, da suraat, en gortoz, ar c'hevrediou boutin, hag eman bepred en o fal c'hoari kontrol e pep giz ouz emsav Breiz.

Dilennadus eo hepken da gomz en hec'h ano ar Vro-gourrien n'o deus ket paouezet, war var o frankiz hag o buhez, a zifenn kaoz Vreiz dre ober ha dre gomz. Ha bet kadarnaet o c'henteliou gand an degouezadou da heul ! Int-i eo ar Greizenn m'en em stummo endro d'ezí Breiz-war'hoaz. En em vodet hizio e Pondivi e reiz Kuzul Brôadel Breiz, e hanvont eur Strollad-oberia hag e fiziont ennan pep galloud d'ober evito e-kenver ar Veli alamanek.

Eur galv a gasont d'an holl Vreiziz o mennad-kalon gwelet o Bro dellezek eus hec'h Amzer-dremenet ha mestrez war hec'h Amzer-da-zont, hag, ouspenn, da spiswel ha da gengarantez an holl boblou o kenoberia en Urz-nevez a zo o c'heneh.

toire breton de toute invasion étrangère. Or, après l'avoir abandonné à la scandaleuse installation des troupes anglaises, le Gouvernement français a abandonné la Bretagne à l'occupation allemande, renonçant *ipso facto* à exercer son autorité sur notre pays.

Sans responsabilité dans les événements actuels, la Bretagne ne doit en bonne justice ni supporter le poids de la défaite française, ni subir le sort des vaincus.

Jamais, depuis 1532, l'heure n'a été si grave et si décisive. Le Peuple Breton se trouve aujourd'hui devant une situation entièrement nouvelle de fait et de droit dont il lui appartient de tirer toutes les conséquences. C'est à lui seul qu'il appartient de décider de son sort, non plus à la France aujourd'hui sans pouvoir, ni à l'Allemagne, simple puissance occupante.

Il importe de donner dès maintenant à la Bretagne le moyen de faire entendre sa voix et reconnaître sa volonté. Celle-ci ne saurait être valablement exprimée par les anciens cadres politiques et corps élus d'avant-guerre, dont la faillite est totale et dont nous payons cher l'aveuglement et la lâcheté. Elle saurait moins encore être exprimée par les fonctionnaires français qui continuent à assurer provisoirement, sous contrôle allemand, la marche des services publics et dont la mission reste de contrarier le relèvement breton par tous les moyens.

Sont seuls qualifiés pour parler en son nom les patriotes qui, au péril de leur liberté et de leur vie, n'ont cessé de défendre la cause bretonne par la parole et par l'action et dont tous les avertissements ont été confirmés par les faits. Ils sont le noyau autour duquel se cristallisera la Bretagne de demain. Réunis en ce jour à Pontivy en Conseil National Breton, ils nomment un Comité Exécutif auquel ils délèguent tout pouvoir d'agir et de les représenter en face de l'autorité allemande. Ils font appel au concours de tous les Bretons ayant à cœur de voir leur pays digne de son passé, maître de son avenir, comme à la sympathie et à la compréhension de tous les peuples participant au nouvel ordre de choses qui est en train de naître.

DISKLERIADUR

kinniget gant ar Strollad-Oberia
ha degemeret dre ar sevel dourn, gant an holl Vretoned,
bodet e Kastell Pondivi d'an 3 a viz Gouere 1940

I. — Kuzul Broadel Breiz a lavar, en ano Pobl Vreiz, n'hello, e nep digouez, stad Breiz beza goude ar brezel an hevelep hini hag araok. Ar c'henreizadur a varne Breiz d'ar maro a zo dismantret da viken hag an holl reolennoù m'oa diazezet warno a zo kouezet en o foull.

II. — Kuzul Broadel Breiz, kannad ar Vretoned a zo damant d'ezo da vad ha da enor o fobl, a oberio, d'an eur dilennet gantañ, evit rei da Vreiz eur renerez-stad broadel, a vo diouz he frammadur-natur ha diouz roudenn he henvoaziou, evit ma c'hello Breiz erfin beva evel eur vroad kerreizet, digabestr en he mennadoù ha perc'hennez war he madou.

III. — Reizadur ar Stad Vreiz, nac'het gantañ ar boaziou a zizurz hag a zislealded kevredigezel o deus kaset Bro-C'hall da goll, a vezo speredet gant ar penn-reolennoù-man :

— Breiz d'ar Vreiziz.

— Mad kumuniezh Breiz da benn-lezenn dreist da emzaman an hiniennou.

— Unvan, Kred ha Dizalc'h ar Renerez.

IV. — Reizadur etrevroadel ar Stad Vreiz, tro he darempredou ouz Bro-C'hall hag Alamagn a vezo divizet dre feuriou divar emgleviou savet e pep frankiz en hentou digoret gant stummadur nevez ar bed.

V. — Er brezel a gendalc'h ouz penn-aotrouniezh Bro-Saoz, e lavar Pobl Vreiz emañ a wir galon a-eneb enebour koz ar Gelted.

VI. — Kuzul Broadel Breiz a zo engortoz ma welo splann an holl n'hon eus nemet berr-amzer evit dont d'ar pal, hag e raio pep-hini diouz kas buan da benn-vat al labour a zigoromp hizio dre zegas dizaman er stourmad e nerz-korf, e youl hag e vadou. Red, ouspenn, beza tud a benn ha sentus ouz reolenn.

DÉCLARATION

proposée par le Comité Exécutif
et adoptée à main levée par l'unanimité des Bretons
réunis au château de Pontivy, le 3 Juillet 1940

I. — Le Conseil National Breton déclare, au nom du Peuple Breton, qu'en toute éventualité la situation de la Bretagne ne pourra plus être après la guerre celle qu'elle était avant. Le système qui condamnait la Bretagne est anéanti à jamais et tous les principes sur lesquels il était fondé se sont effondrés.

II. — Le Conseil National Breton, organe représentatif des Bretons soucieux du bien collectif et de l'honneur de leur peuple, agit à l'heure choisie par lui pour doter la Bretagne d'un Etat National, dans son cadre naturel et dans l'esprit de sa tradition, afin qu'elle puisse vivre enfin en nation organisée, libre de ses aspirations et maîtresse de ses intérêts.

III. — La Constitution de l'Etat Breton, répudiant les habitudes de désordre et d'injustice sociale qui ont causé la perte de la France, s'inspirera des principes suivants :

— La Bretagne aux Bretons ;

— Le bien de la communauté bretonne comme loi suprême au-dessus de tous les égoïsmes ;

— L'unité, la responsabilité et l'indépendance de la direction.

IV. — Le statut international de l'Etat Breton, la nature de ses relations avec la France et l'Allemagne seront définis par des accords librement discutés dans le cadre des possibilités offertes par les nouvelles conditions générales.

V. — Dans la guerre qui se poursuit contre l'hégémonie anglaise, le Peuple Breton tient à affirmer qu'il est, de tout cœur, contre le vieil ennemi des Celtes.

VI. — Le Conseil National Breton compte que chacun, ayant compris que nous avons peu de temps pour aboutir, assurera le succès rapide de l'action entreprise en ce jour en engageant sans réserve son corps, sa volonté et ses biens dans la lutte, ainsi qu'en faisant montre de caractère et de discipline.

ROLL-MENNADOU

1. — Pobl Vreiz a zo anezi eur gumuniez e kenver ar ouenn, ar spered, ar renerez-stad, ar gevredigez hag an arboellerez.

2. — E kumuniez ar Bobl emañ ar Veli. Stag eo dleadou ha gwiriou pep Breizad ouz mad ar gumuniez.

3. — Diazevadur ar Stad Vreiz hag adsavidigez Bro-Vreiz a c'houlenn striz renerez eur Pennadur kiriek eus e renerez.

Ar penn-pobl, skoaziet gant eur c'huzul, a gas da vat youl ar bobl, a unvan gant bodadou tud, anezo dileuridi eus nerziou beo ar bobl.

4. — Pep Breizad dellezek a vezo galvet da gemer perz e kefrediou ar vro hervez e ampartiz.

5. — Ar frankiz a Gredenn a zo gwarantet d'an holl Vreiziz. An darempredou etre ar Stad Vreiz hag an Iliz a vezo reizet dre eun Emgleo.

6. — Frankiz an deskadurez a vezo adsavet. An tiez skol o labourat war gelennadurez speredel ha broadel ar yaouankiz a chom dindan evezierz ar Stad. Savet e vo ar gelennadurez goude-skol ha micherel.

7. — Ar yezou-stad a vo anezo ar brezoneg, yez vrâdel, hag ar galleg.

Diazezet e vo deskadurez an diou yez hervez ezommon ha mad Pobl Vreiz. Roet e vo de Vreiz eun Holl-zeskadurez klok, eur Skol Veur Geltiek a vo krouet e Breiz-Izel.

8. — Ar C'helaouennou, ar bann-gomzerez, ar Moulerez a vo ret d'ezo labourat da adsavidigez ar vro.

9. — An tiegez a zo anezañ penn-danvez ar gumuniez ha setu perak e vo gwarezet piz.

10. — Yec'hed ha buhezegez-vat ar bobl, stourm ouz ar vezventi a vezo suraet en eun doare striz.

11. — An donar hag ar madou-leve, diazezet e Breiz, n'hellint beza perc'hennet nemet gant Bretoned.

PROGRAMME

1. — Le Peuple Breton forme une communauté ethnique, spirituelle, politique, sociale, économique.

2. — La souveraineté réside dans la communauté du peuple. Les devoirs et les droits de chaque Breton sont définis par l'intérêt de la communauté.

3. — L'établissement de l'Etat Breton et le relèvement de la Bretagne exigent la direction d'un Chef responsable.

Assisté d'un Conseil, le Chef exécute la volonté du peuple en liaison avec des Assemblées représentant les forces vivantes de la Nation.

4. — Tout Breton digne sera appelé à participer aux affaires publiques dans la mesure de ses capacités.

5. — La liberté religieuse sera garantie à tous les Bretons. Les rapports de l'Etat Breton et de l'Eglise seront réglés par un Concordat.

6. — La liberté d'enseignement sera rétablie. Les établissements d'enseignement concourant à l'éducation morale et nationale de la jeunesse resteront soumis à la surveillance de l'Etat. L'enseignement post-scolaire et professionnel sera réalisé.

7. — Les langues officielles seront le breton, langue nationale, et le français.

L'enseignement des deux langues sera assuré suivant les besoins et les intérêts du peuple breton. La Bretagne sera dotée d'un enseignement universitaire complet. Une Université Celtique sera créée en Basse-Bretagne.

8. — La presse, la radio, l'édition devront concourir au relèvement national.

9. — La famille est la cellule organique de la communauté bretonne et jouira comme telle de la protection la plus complète.

10. — La santé, la moralité publiques et la répression de l'alcoolisme seront assurées de façon rigoureuse.

11. — La terre et les immeubles sis en Bretagne ne peuvent appartenir qu'à des Bretons.

12. — Pinvidigeziou Breiz, aloubet gant Gallaoued, a vo daskoret d'ar Stad Vreizat.

13. — El labour emañ diazevez pinvidigez espernel ha kumuniezh Breiz.

An holl labourerien : labourerien-douar, labourerien-kêr, tud a vor, micherourien a vo lakaet dindan gwarez ar gumuniezh ; labour hag eur pae dereat a vezo suraet d'ezo holl ; ar priziou a vo stabilaet ; an trafikerezh-arc'hant hag an uzurerezh a vo difennet. Priziou gounidus a vo suraet da frouez an douar, Pep rumm al labourerien en devo dileuridi e-kichen ar Stad.

14. — Ar c'henwerzh hag an ijinerezh a vezo dizalc'h nemet e rankint suja da ezommoù an espernerezh broadel.

15. — Pesketaerien ha merdeidi a gendalc'ho da denna o mad eus o reoladur-bremañ, nemet e vezo gwallaet ar c'henta ar gwella. Ijinerezh ar besketerezh hag an ijinerezhou stag outañ a vezo adurriet, e doare da suraet eur pae dereat d'ar besketerien ha da labourerien an ijinerezhou, diwar sevel kontradou rannbloaziek ha kreski fred an ijinerezhou.

16. — Kargidi vreizat a vo dalc'het en o c'harg.

Ar pañsionou hag al leveou-retred a gendalc'ho da veza paeet d'ar Vretoned o deus ar gwir d'ezo hizio an deiz hag ouspenn en eur doare rekis e vezint reizet.

17. — Staga vo graet dioustu da bourchas binviou-labour da espernerezh Breiz ha d'he lakaat da c'hounit hervez eur roll-labourioù hirbad ha kaset da benn, diouz ma vezo al labour-ze da ober prim pe primoc'h, evel : stumma ar c'hériou hag an embregereziou-dilec'hiaat diouz eun doare bremañ, sevel tiez d'al labourerien e kêr, adaoza ar mereurioù war ar maez, digeri henchou etre kêriadennou ha kêriou, kempenn ar porziou pesketa ha kenwerzh, toulla mengleuzioù, kroui kreizennou micherion hag ijinerezhou eus ar vro.

Al labourerien hag ar vicherourien dilabour a vo da genta galvet da gas da benn ar roll-labourioù-se.

18. — Amzer vak hag ehan-labour al labourerien a vezo troët war du eur vuhez yac'h dre ar sportoù, ar beajoù hag an deskadurezh, evit ma kavo pep unan gopr e striv el levenez beva.

12. — Les richesses bretonnes accaparées par les Français feront retour à l'Etat Breton.

13. — Le travail est la base de la richesse économique et de la communauté bretonne.

Les travailleurs paysans, ouvriers, marins, artisans, seront placés sous la protection de la communauté ; du travail et des salaires vitaux seront assurés à tous, la stabilité des prix établie, la spéculation et l'usure interdites.

Des prix rémunérateurs seront assurés aux denrées agricoles.

Chaque catégorie de travailleurs sera représentée auprès de l'Etat.

14. — Le commerce et l'industrie seront libres sous réserve du respect des besoins de l'économie nationale.

15. — Les pêcheurs et marins garderont le bénéfice de leur statut qui sera amélioré au plus vite. L'industrie de la pêche et les industries annexes seront réorganisées, de façon à assurer des salaires vitaux aux pêcheurs et aux ouvriers d'usine, par l'établissement de contrats saisonniers et l'accroissement des débouchés.

16. — Les fonctionnaires bretons resteront en place.

Le service des retraites et pensions sera garanti aux bénéficiaires bretons actuels et les réajustements nécessaires seront faits.

17. — L'équipement économique et la mise en valeur de la Bretagne seront immédiatement entrepris sur la base d'un plan de longue durée, et exécuté dans l'ordre d'urgence, tels que : modernisation des villes et des moyens de transport, logements ouvriers, reconstruction des fermes, chemins ruraux et routes, aménagement des ports de pêche et de commerce, ouverture de mines, création de centres d'artisanat et d'industries locales.

Les ouvriers et les artisans en chômage seront appelés par priorité à l'exécution du plan.

18. — Les loisirs et les vacances des travailleurs seront orientés vers la vie saine par les sports, les voyages et la culture, afin que chacun trouve la récompense de son effort dans la joie de vivre.



MOULEREZ
AR C'HUZUL
BROADEL BREIZ

IMPRIMERIE
DU CONSEIL
NATIONAL
BRETON